

496

Var maro ar Prinç Royal an Aeltron an Duc d'Orleans,
 c'hoarvezet ar merc'her 13 eus ar presant mis Gouere 1842,
 d'an oad a 31 bloas, 10 mis ha 10 devez.

(440, suite)

Eur voël a gaon a zo var ar Franç displeguet :
 An Duc a Orleans, tiroas ! zo decedet !...

(441)

.....

 Gent oreiz-dez, an drizec abresant mis gouere,
 Da vont da Sant-Omer ar Prinç n'em brepare.
 Tleout a rê, gent-se, mont da gastel Neuilli
 Da velet e famill hac outi qimiadi ;
 Mes qezec e garos qen terrufl a spontas,
 M'en em gavas ar Prinç en eun danger goal vras.
 Ne voa en e garros nemertan e-unan.
 Pa vel voa calz a risq, e sav diouc'h-tu buan,
 E tigor ar stalaf hac a saill prim ermez :
 Allas ! a zounn e couez en e za, ar Prinç qez !
 Hac ar strong eus al lam en devez bet fraillet
 Diouc'h-tu leven e quein, hac e zeo discaret,
 Hep nep anaoudequez e chom var ar pave,
 Hac e tiredjot prest vit e zewel neuze.
 En eur stal a voa tost e voe diouc'h-tu douguet,
 Hac e zeo bet eno var eur c'holc'hed proset.

Ar Rouanez, e vam, ar vam-ze, qer tener,
 A zired, dishalam, da velet e mab qer.
 E dad mad, ar Roue, a erruas soudan.
 Sonjit, sonjit, m'ho ped, Bretonet christenien,
 Pebes arvest horrufl en em offras neuze
 D'ar Rouanez, e vam, ha d'e dad, ar Roue !
 Guelet o mab caret, esperanç o c'hosni,
 O souffr qer bras poannion en e hir angoni !

(442)

Ret eo beza, pe dad, pe mam, a dra certen,
 Evit gouzout ervat petra voe o anqem.
 Ar querent all a zo en em gavet en tij,

E pelec'h ne glêvet nemet hirvoud ha cri .
 Er moment m'erruas dirazân e vam vad ,
 E tûrillas daelou demeus e zaoulougad
 Pere voa digor franc . En despet d'an oll cher ,
 Ar paour qez maleurus n'ellas prononci quer .
 Ar Rouanez a gass un express da Neuilli ,
 Da bedi ar person da zont prim d'en noui .
 Gerqent ci'h erruas , hac Ero an nouen ,
 O recommandi 'r Prinç d'er C'hrouer souveren .
 Ar maleur a voa bet erruet gent creiz-de ,
 Hac argoni ar Prinç da deir heur a bade !
 Bâr eo e oll boanniou Renta ra e ene
 Evel eur giùr gristen bars en ascre Doue .
 D'an Duqes d'Orleans e voe neuze casset
 Eur c'hourier d'annonç dei fin hornupl e fried .
 Pequen truezus voa quelet bars en eur stal
 Daoulinet , leun daelou , an oll famill royal !
 An tad qer , ar vam basur , a boqe d'o buquel ,
 Hac etre o dirrec'h er gieljont o vervel !!! . . .
 Neuze var eur brancard ar c'horf a voe douguet
 Gant sous-officierien , hac e voe deposet
 Ebars chapel Neuilli , en castel ar roue ,
 Dindan protection Roue ar Rouane .
 Ar famill royal , leun eus a affliction ,
 A heuillas ar c'horf paour gant giùr devotion ;
 Ar cheffou bras a Franç a voa en em rentet ,
 Hac a heuille ar c'horf gant ar brassa respet .
 En Paris na glêvet dre oll met hirvoudou ,
 Gerqent ha ma voe bet eus ar maleur qelou .
 Ar Prinç arve qer mad ha qen affabl bepret !
 Gant an oll zoudarded dreist oll e voa caret ;
 Rac , neus fors e peq bro n'ém gave hoq arme ,
 An Duc a Orleans en em gave ive :
 En Anvers , en Afrig en devoa combattet .
 Evel ar vaillantâ demeus ar zoudarded .
 An diverza soudard a voa mignon dezân ,
 Hac eur garantez vras o devoa evitan .
 Ar brassa testenî da renta d'e vemor ,
 Eo beza unanet ha fidel d'an enor .
 Caromp-tâ hor Franç qer , ouz en em garout oll ;
 Pedomp vit ar Prinç mad e zomp o paouez coll ,

(443)

(444)

498

Ha ra ellimp, beva gant ar ferm esperanç
 Da velet, pell-amzer, an union en Franç!
 Ra deuy va c'henvrois demeus a Vreiz-Izel,
 O lenn ar recit - m'ân deus eur maro cruel,
 En deus privet ar Franç demeus ar Prinç Royal,
 Prinç just, mignon d'an oll, ha den meurbet leal,
 Da bedi hor c'hrouer vit repos e ene,
 Ha ma vo recevet en Barados Doue!

20 Gouere 1842. A. Lédan.

Ar c'henta scrit-dorn a adressis d'an Autrou an Duc de Nemours, p'hini,
 ar 25 eus ar memes mis an enoras dre eul lizer a drugarez.

(Vol. IV, p. 440-444.)